

Gerioù ar vuhez

NEUD




Neud

Un neudenn

An nadoz

« An neud a vez lakaet ba toull an nadoz »



Un neudennad, ar pezh a vez lakaet e-barzh an nadoz

http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennaou_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

Neudañ, ober neud

« Ur c'harr-nezañ gloan »


Neudenniñ, lakaat neud en-dro d'ar c'hig

An neuder, an den a ra neud

« Poan 'm bez 'lakaat an neud b'an nadoz »,
poan 'm bez 'kregiñ gant un dra bennaket

« Kollet 'm eus ma neudenn »,
pa vezer o komz deus un dra ha ne oarit ket ken
pelec'h oc'h en em gavet

Evit farsal e veze lâret
Taldir Jafrennou « Kerneud »
diwar-benn ar skrivagner deus Karnoed



« Neud-gwriat »

« Neud-gloan »

« Neud-lien »


« Neud-kanab »

« Neud-orjal »

« Neud-aour »

« Neud-gad »,
anv ur blantenn hag a vev
o sunañ gwad ar
plantenoù en-dro dezhi

« Neudenn ar vuhez »,
funig ar begel



E-barzh an Aviel e vez lâret :

« Ar pinvidik 'vo ken diaes
dezhañ mont d'ar baradoz
hag ur c'hañval da dremen
ba toull un nadoz »

Cofinancé par
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



Avec le Fonds européens
de développement régional